

BREZHONEG ER FAMILHOÙ

15 - 21 a viz Gouere 2018 e Kastellin

Brezhoneg er skol zo mat, met er gêr e chom e toull an nor re alies, ne dremen ket treuzoù an ti.

Fellout a ra deomp skoazellañ an tadoù hag ar mammoù a oar brezhoneg un tamm ha ne gredont ket ober da vat ganti er gêr c'hoazh.

Degemeret e vo kerent gant o bugale dindan 6 vloaz peurgetket, ar vugale a chomo a-hed an devezh e karg o zud. An dud gant bugale koshoc'h ha c'hoant ganto tremen amzer e brezhoneg asambles gant o bugale a vo degemeret ivez.

Degemeret e vo tud divugel ivez, c'hoant ganto da zesevel o bugale da zont e brezhoneg, hag ivez an dud o labourat war dachenn ar bugaligoù.

Labouret e vo e prantadoù berr, war demoù tost ouzh ar vuhez pemdez ; aozet e vo pourmenadennoù, c'hoarioù a-stroll, desket kontañ istorioù ha rimadelloù kanaouennoù ha labour-dorn. Bez 'vo prantadoù hep ar vugale ivez. Kemer a raio perzh Divskouarn evit mareadoù pleustriñ hag eskemm war danvezioù teorikel gant an dud deuet nemetken ; prantadoù all a vo evit deskiñ kanañ, dañsal ha c'hoari holl asambles.

E Skol-Hañv KEAV, en em gavo stajidi ar rummad "Brezhoneg er Familhoù" en ur bed brezhoneg, lod anezho a vo gant bugale desavet e brezhoneg, lod all o devo skiant-prenet war an dachenn-se. Ar gwellañ endro eo evit reiñ kalon dezho ha sikour anezho da gas o raktres betek ar penn.

Evit gouzout hiroc'h, deuit e darempred gant KEAV

keav@keav.bzh - pgz 02 98 95 59 31 - 06 06 45 85 08 - keav.bzh